

**Un dibenn-sizhun kampiñ
E BREZHONEG
er Vro Vigoudenn**

**Evit ar familhoù gant bugaligoù ha bugale, hag evit an dud deuet
Deuit da vevañ e brezhoneg e-pad un dibenn-sizhun !**




Titouroù + enskrivadurioù : 06 22 53 13 21 bef@keav.bzh

Gant souten :

Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù hag an dud gour a zeuio hep bugel

Kinniget e vo da bep hini kemer perzh er mont-en-dro.



*Ar programm vo resisaet war blas

Priz an dibenn-sizhun

- **Predoù:** dijuni, merenn & koan ar Sadorn, dijuni & merenn ar Sul.
- **Bod** ar Gwener hag ar Sadorn noz: lojañ ar refet en un ti-koad pe war un dachennig-kampiñ gant ho teltenn / karavanenn / karr-kampiñ ...

Da zegas : piknik ar Gwener noz, ar gwin evet ouzh taol.

Resisaet e vo deoc'h an dafar da zegas pa vo kadarnaet ho enskrivadur.

**Adalek 2023 e vez kontet 5€ / zen gour evit ar skodenn-vloaziek. An dud o deus paet dija n'o do ket da baeañ 2 wech.*

Priz digresket pe prizioù all, deuit e darempred ganeomp.

Prizioù ar staj	Ti-koad	Tachennig
Den gour*	80,00 €	65,00 €
Bugel (etre 2 ha 12 vloaz)	55,00 €	45,00 €
Adalek an eil bugel	35,00 €	30,00 €
Bugel (dindan 2 vloaz)	0,00 €	0,00 €

Plijadur a vo e brezhoneg gant ar re vihan hag ar re vras !



Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù hag an dud gour a zeuio hep bugel

Gwener 12 (adal 5e1/2), betek ar
Sul 14 a viz Mae 2023 (betek 4e)

E Ploneour-Lanwern, en dachenn-gampañ
«le bonheur côté pré»

PAPERENN-ENSKRIVAÑ

Tud deuet

Anv-familh	Anv-bihan
.....
.....

Chomlec'h : kod-post kêr :

Chomlec'h elektronek :

Niverenn(où) pellgomz.....ha.....

Bugale

Anv-familh	Anv-bihan	ganet d' .../.../...	Skoliataet e brezhoneg ?	Hentad ar skol
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
			Ya <input type="checkbox"/> N'eo ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>

Doare-lojañ:

Ti-koad

pe

Tachennig-kampañ

	ya	ket
Bod : (Nemet evit an dud o kousket en tier-koad) Mat e vo din kousket gant tud all el lojeiz. Un gambr pep hini ho po memestra.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Son: Dont a rin gant ur benveg sonerezh:	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Yec'hed : Allergiezh pe angougemer (<i>intolérant</i>) ouzh tra-mañ-tra.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Aotren a ran KEAV da boltrediñ, filmañ an dud, gour ha bugale evit o zeulioù brudañ hag o lec'hiennoù.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Dont a rin gant ar stummadur dibaouez .	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>

Deiziad:

Sinañ:

Da gas **a-benn ar 5/05/23** :

dre bostel: bef@keav.bzh

pe dre lizher: Faned Labbay (KEAV); 11 imp/ hent-dall Kerfant; 22220 Landreger / Tréguier

Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù hag an dud gour a zeuio hep bugel

Deuit HOLL evit kaout plijadur en ul lec'h kaer ha degemerus !

Eus ar Gwener 12 d'ar Sul 14 a viz Mae 2023 e vo dalc'het ur staj e PLONEOUR-LANWERN gant KEAV. Pal ar staj zo sikour ar familhoù da gaozeal brezhoneg etrezo : ar vugale, ar vugaligoù hag o zud a oar un tamm brezhoneg, un tamm mat a vrezhoneg zoken, met n'eo ken aezet a se atav kaozeal brezhoneg er familh pa vezer krog da gaozeal galleg.

D'ar familhoù a gomz brezhoneg etrezo disoursi e vo un doare da vevañ e brezhoneg en un endro plijus, ober anaoudegezh gant familhoù nevez ha sikour ar familhoù all.

C'hoarioù a vo graet etre ar vugale, evito d'ober anaoudegezh an eil gant egile, ha kalz a obererezhioù e brezhoneg, bugale hag o zud asambles : c'hoarioù a bep seurt, pourmen, kanañ, dañsal, labour- dorn, beilhadegoù....

D'an dud gour a zeuio hep bugel e vo kinniget kemer perzh en obererezhioù ar familhoù da vareoù zo ha d'ar mareoù all e vo kinniget dezho obererezhioù a-ratozh evito, baleadennoù natur gant pep e dem, kejañ gant brezhonegerien ar vro, ha nozvezhioù laouen !

Atav ez eus bet graet ur plas d'ar vugale ha d'o familhoù e kampoù KEAV. Met, er mare-mañ, muioc'h eget ma oa bet biskoazh, eo a bouez bras sikour ar familhoù en o strivoù d'ober eus ar brezhoneg o yezh... Dazont ar yezh zo e familhoù ar vrezhonegerien. Pa vez kaozeet brezhoneg gant ar vugale en o familhoù, e teskont o yezh tamm-ha-tamm, e karont anezhi, hag e vezont prest da vont hardi, dizaon, e bed ar galleg pe ar saozneg hep disoñjal ar brezhoneg...

Ar brezhoneg er skol zo un dra vat, met ma ne vez ket kaozeet brezhoneg er familhoù, n'eo nemet un touell.... Abalamour da se e lavaromp : e pep korn-bro e rankomp aozañ stajoù brezhoneg evit ar vugale hag o familhoù. E pep korn-bro hag aliesoc'h-aliesañ !

Lakaat ar vugale, o zud ha tud gour all da vevañ asambles e brezhoneg a zo un doare da ziskouez eo ar brezhoneg yezh ar gevredigezh, yezh an holl.

Gwelet ar vugale ha komz ganto, evit an dud gour eo bevañ ar brouenn ez eus un dazont d'ar brezhoneg ; evit ar vugale, gwelet tud all estreget o zud o komz brezhoneg a zo meizañ e c'hall ar brezhoneg bezañ yezh ur gevredigezh. Abalamour da se e tegemerimp ivez tud gour ha n'eus bugel ebet gante. Plijadur da gomz gant tud all ha gant bugale o devo, ha gant brezhonegerien tro-dro da Ploneour ivez.

**Deuit niverus d'an dibenn-sizhun brezhoneg e Ploneour,
d'ar Gwener 12, Sadorn 13, ha Sul 14 a viz Mae 2023
da c'hoari ha da vevañ e brezhoneg !**